


EMSAV



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 17 - Mae 1968

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F
Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV
30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Roll an Emsav eo bezañ poell ar vro	p. 131
An Emsav hag ar Vro (2)	p. 136
Lizheroù p. 136, Danevelloù obererezh p. 141, Lennadennoù p.142, Darvoudoù p. 144, Kemennadenn a-berzh <u>Skourr an Deskadurezh Vroadel</u> p. 148.	
Notennoù armerzhel (15), ar monc'hwezh	p. 149

ROLL AN EMSAV EO BEZAÑ POELL AR VRO

"Me zo Brezhon mat : serret e vo va stal d'an 8 a viz Mae",
"Hennezh a ya da labourat en deiz-se. N'eo ket ur Brezhon mat !"
Frazennoù seurt ar re-se a gleved war ar straed e kêrioù Breizh en
deizioù a-raok an devezh ec'hwel hollek divizet evit an div Ranndir
Steuñvel Bretagne ha Pays de Loire. Hag-eñ e oar an dud a zistage
ar frazennoù-se ez eus un Emsav en o bro ? N'eo ket sur. Evel al
lanv e sav koulskoude an emskiant vro e Breizh. Fazi e ve avat
krediñ e kavo an emskiant-se he hent diouti hec'h-unan betek reiñ
diskoulm da gudennoù ar vro. Ul luskad emdarzhek eo ha ne dizho pal
ebet drezañ e-unan dre an arbenn eeun ma ne sell ouzh pal ebet.
Daoust d'an derzhienn a ren er vro en deizioù-mañ e ranker diawelout
e vo hir an argerzhad hag e tremeno c'hoazh dre brantadoù diflach.

Mat eo degas spisadurioù da roll an Emsav e seurt degouezhioù
(1). Ur roll kemplezh eo hep mar hini an Emsav, rak e kement lec'h
m'emañ Breizhiz o stourm evit o buhez emañ lec'h an Emsav. Ur gefridi
ez eus avat ha na c'hell bezañ sammet nemet gant an Emsav, ur gefridi
a zo deuet he mare da vezañ sevenet : degas ar poell a vank d'al
luskadoù emdarzhek, ar poell en o mennadoù e-keñver diazez ha pal,
ar poell kenetrezo.

Aes eo merzout n'eus na diazez boutin na pal boutin da vennadoù
an dud hag ar strolladoù a zo o klask dienkañ Breizh. An deiz all en
un emvod-kelaouiñ e klevemp ur rener c'hweluniad o tisplegañ : "Ur
si hon eus na bardon ket deomp ar gouarnamant : ne ankouaomp ket ez
omp Brezhoned". Aze emañ an dalc'h. Un dra bennak eo Breizh d'ar
Vrezhoned, anat eo se dezho. Met petra ? Un arliv lec'hel ? Muioc'h
a dra sur, rak echu eo an amzer ma'z ae an danvez deputed d'ober o
zroiennoù gwisket ganto chupenn ar goueriaded. Arouezius e oa evelkent
ar chupenn-se. N'he gweler ket ken; hag-eñ e c'haller lavarout avat

ez eo bet diwisket diwar ar speredoù ? Nann. Breizh zo ur gwariadur o virout ouzh ar politikerezh gall a c'hoari yac'h el ledenez-mañ, dre berzh trivliadoù henvoazel a zo c'hoazh o strobañ ar speredoù; - emañ an hevelep trivliadelezh o virout ivez ouzh mui-cc'h-mui a Vrezhoned a guitaat o c'horn-bro, pa vije o mad armerzhel dezho ha mad armerzh Frañs war un dro ez agent da annezañ e kornioù all eus ar riez. An emzalc'h-se, ouzhpenn ma skoilh ouzh emled heneuz an armerzh gall, ne zegas netra d'ar Vrezhoned o-unan nemet ur meni gwalc'h klañvus da drivliadoù moustret ha difrouezh, n'int mat nemet da seizañ ar spered. Un emzalc'h diboell eo forzh penaos, hag ar C'hallaoued ne oant ket re chalet gantañ, pa welent ennañ un dilerc'h eus an tremened, a steuzfe dre ret e Breizh evel ma steuzias er proviñsoù all. Hag ar Vrezhoned desket a soñje evelto dre vras, ar re da nebeutañ a felle dezho kemer perzh leun e buhez ar riez c'hall, - lakaat a reomp er-maez bihanniver an Emsav evel just. Betek agent-aou enta ne grede ket ar Vrezhoned lakaat Breizh da gontañ evel arguzenn en o mennadoù keodedel, nag en divizoù a gemerent evit ren o buhez politikel. Un doare "maner kuzh" e chome Breizh en o spered, dianzavet ganto e gouloù kriz ar vuhez foran, ha noazus, rak seurt "manerioù kuzh" a vez bepred repu ar pobloù trec'h a-raok ma'z eont da get.

Hiziv avat n'eo ket heñvel gont ken. Ar gerioù "Breizh" ha "brezhon"eo marteze ar gerioù a glever ar paotañ war ar straed hag en emvodoù politikel dreist-holl. Hogen ar Vreizh-se, ar vrezhonelezh-se a zo o tiboukañ eus teñvalder ar speredoù el lavar pemdeziek, e c'haller ivez en em c'houlenn petra ez int evit ar re a ra ganto ken paot.

Pa gomz ar bolitikerion, ar pennoù c'hweluniad eus Breizh, e c'haller goulenn petore devoud politikel ez eo ar Vreizh-se en o mennadur. Lezomp a-gostez ar gudenn da c'houzout ha krediñ a ra pe get ar politiker er Vreizh-se kemeret gantañ da arguzenn, rak zoken ma ne gred ket enni, e ra ganti peogwir e oar emañ an emskiant vro o kemer pouez er meno foran. Met dres, goulenn a reomp en-dro petore

pouez. Un devoud degaset e kont gant ur politiker zo dre ret un devoud politikel. Petore devoud politikel e c'hell neuze Breizh bezañ e meizerezh ar bolitikerion ?

"Mourir pour le Finistère" a c'hoapae n'eus ket pell ar Peuple Breton o tezvarn C.A.BR.O.. Hogen ma ne varver ket evit un departamant gall, ne varver ket muioc'h evit pemp departamant gall, - ar C'hallaoued o-unan ne varvont ket evit o departamantoù; pa reont, ez eo evit rezid o bro. Mar'd eus hiziv Brezhoned a zo prest da vervel, bezomp asur n'eo ket evit diorreadur un, daou, tri pe bemp departamant gall, met evit an dra nemetañ a c'hell talvout kement hag o buhez, rezid o bro. Ha gouezet ganto pe get, an arguzenn Breizh arveret gant ar bolitikerion n'he deus poell, ha dre-se nerzh, nemet pa ra dave da rezid Breizh, ha da netra a-hend-all. Breizh zo ur vro evel ma'z eo Frañs ur vro; al lakadenn eeun-se, deuet ken boutin evidomp ma tremenomp pell 'zo hep he menegiñ, zo koulskoude enni an alc'houez evit meizañ ar pezh a dremen e Breizh, ha war un dro ez eo poell an ober a zo da ren hiziv e Breizh. Enni hepken e c'hell kejañ ar galon hag ar meiz, an trivliadoù hag ar poell, al levenez vevañ hag ar berzh politikel, armerzhel, kevredigezhel. Ar Vreizh gouest da vezañ degaset evel devoud politikel, ar Vreizh gouest da entanañ ar yaouankiz, zo Breizh evel danvez bro dieub ha ne c'hell bezañ netra all.

Daoust d'an diouer a ziazez boutin hag a bal gwirion, daoust da strivoù ar galloud sujer evit rannañ poblañs Vreizh e departamantoù, e micherioù, e kostezennoù, evit he meskañ gant poblañsoù Kornog Frañs, ez eus ul lusk anat d'an unvaniezh e pep lec'h er vro. Met aze ivez emañ dallentez an askreoù o c'hoari; bezañs kreñv an devoud Breizh zo o pouezañ war ar speredoù, met ne greder ket reiñ dezhañ ul lec'h e reizhiad an arguzennoù e sell eus an unvaniezh c'hoantaet. Ne greder ket teurel ur sell eeun war ar pezh a c'hoarvez e Breizh, ha dizoleiñ ar ster eeun a zo o tont gant an darvoudoù. Ken ez eo souezhet, nec'het, broudet, entanet mesk-ha-mesk, an dud e Breizh

gant ar pezh a lavarer e Bro-C'hall diwar o fenn. Rak evit ar meno foran e Frañs, evit kazetennerion Paris, ez eo unsteriek ar pezh a c'hoarvez e Breizh : fourgas ar gouerion, an F.L.B., an U.D.B., S.A.D.E.D. hag all ne reont nemet un hevelep froud : youl Breizh o klask e hent ha prest da ziskar kement fardell a gavo dirazi. Penaos meizañ ez eo anat da gazetennion estren ar pezh a zo c'hoazh e par ar buhezadur dangorel gant Breizhiz o-unan. Eeun eo d'hor meno an displegadur. Evel pep pobl mestrez war he zonkadur, o deus ar C'hall-
 X aoued ar skiant istorek, da lavarout eo e vezont war-eeun evel Istor, evel o Istor o kenderc'hel, kement a c'hoarvez dezho hag en-dro dezho. En Istor emaint (2). N'o deus poan ebet enta oc'h ober ur sell istorek ouzh Breizh, o kompren gwelloc'h eget Breizhiz o-unan ar pezh a dremen en o bro. Rak Breizhiz, evel pep pobl dizorniet eus ar vestroni war he zonkadur, n'o deus ket ar skiant istorek, ha dic'houest int da veizañ war-eeun darvoudoù o buhez evel darvoudoù an Istor, evel darvoudoù un Istor a ve o hini. En anistor emaint. Ezhomm o deus da gaout jubennourion, ganto ar skiant istorek, evit anaout ur ster da gement darvoud politikel, kevredigezhel, armerzhel a c'hoarvez ganto. Menegomp hepken ar brud gounezet gant ar studi gevredadouriezh war bPlozeved, ar gwerzh souezhus he deus kavet e Breizh an niverenn eus Nouvel Observateur gourzitlet : Les fellagha bretons (3). Bennozh a zleomp reiñ da gazetennion ar gostezenn gleiz c'hall nannkomunour evit al labour jubenniñ a reont. Koulskoude ne c'hellomp ket kenderc'hel da gontañ war skoazell bepred arvarus an estrenion evit kas da benn hol labour !

An holl luskadoù a ya d'ober ar froud vrezhon hiziv ne c'hellont ket kenderc'hel ivez da redek en o stumm emdarzhek, lusket dre venn-adoù dispis ha berrbad. Na ankouaomp ket emañ dirazo emouiziegezh ar galloud sujer : ar Stad C'hall zo anezhi un nerzh poellek, padus ha spiswel; setu kantvedoù ma ra berzh ha ma pad, ha kredomp mat n'eo ket dre nerzh luskadoù emdarzhek ha mennadoù berrsell eo e chom en he sav. Da lavarout eo n'en devez ket un nerzh emdarzhek an dist-
 X erañ chañs d'ober berzh dirak ur seurt emouiziegezh. Ha pa vije

Breizhiz 50 milion hag ar C'hallaoued 3 milion hepken, e vije trec'h c'hoazh ar C'hallaoued, mar chomje Breizhiz en o emdarzhegezh.

Mallus eo enta siellañ dre boell an emouiziegezh an nerzhoù strewet a labour e Breizh. Aze c'hoazh emañ roll diziouerus an Emsav : degas ar poell nemetañ gouest da unvaniñ an holl luskadoù a stourm evit pobl ar Vrezhoned hiziv; dre verkañ dezho ar pal fraezh, kempoell hag oberatael : savelidigezh ar vro evel bro dieub, diazezidigezh ar bobl vrezhon evel pobl en he rezid ha mestrez war he zonkadur en ur riez vrezhon e-touez riezoù all ar bed.

Hent an Emsav zo a-raok pep tra hent ar poell, gouest da unvaniñ ar vro war un diazez fetis ha reizh war un dro; dre-se ez eo ivez hent ar pleustr, gouest da gas d'an trec'h kement stourm renet gant tud ar vro evit mad ar vro; hent an dellid eo dreist-holl, rak kas a ra d'an trec'h nemetañ gouest da welc'hiñ diwarnomp ar vevh berniet gant kantvedoù a faezhegezh hag a emzispriz.

(1) Sl. Roll an Emsav, Emsav 4/91.

(2) Sl. G.ETIENNE, Isdiorreadur ha bredoniezh, Preder 84-85/45 1966.

(3) Sl. Lennadennoù, Emsav 17/142.

"O kevarc'hañ krouidigezh an U.G.T.A. (Unaniezh Hollek Labourerion Aljeria), e kevarc'h an F.L.N. disoc'h ur stourmad yac'h renet gant al labourerion ouzh levezon seizus renerion C.G.T., F.O. ha C.F.T.C..

"Roll an U.G.T.A. eo skoazellañ poblañs ar c'hopriddi da zont er-maez eus latar ar mennadoù dispis hag eus politikerezh ar betegwel...

"An eztaol eo an U.G.T.A. eus an dreuzfurmidigezh don c'hoarvezet en emsav micherour da heul un hir emdroadur ha dreist-holl goude ar reverzhi dispac'hel devoudet gant an emgann evit dieubiñ ar vro."

Kemennadenn an F.L.N. diwar-benn an U.G.T.A. (arroud) in Plateforme de la Révolution Algérienne, 1956.

A N E M S A V H A G A R V R O (2)

LIZHEROU

"Ret eo deomp-ni kaout da gentañ ur weledigezh eus ar gevredigezh a fell deomp sevel e Breizh ha, da heul, goulenn digant an armerzhourion, - a chom kalvezourion, - hon harpañ da seveniñ ar weledigezh-se. Evidon-me ec'h anzavan e hiraezhan d'ur gevredigezh muioc'h unvan eget n'eus bet biskoazh e Breizh. Hañvalout a ra X lavarout e vo atav renkadoù e Breizh, evel e pep bro. Me ' gav din avat eo en dro-mañ e tleomp ober an diforc'h etre renk-ad ha kendere. Moarvat e vo atav kendereoù e Breizh dre ma chomo liesseurt ar c'hargoù en ur gevredigezh ha daoust ma'z ay war zisteraat an diforc'hioù barr- ha doare-bevañ en amzer-da-zont. Pezh a zleomp distrujañ avat eo ar renkadoù, da lavarout eo an emskiant a c'hell kaout an dud a vezañ didoueziet diouzh ar peurrest eus ar vroad. Hag an amkan-se ne c'hell bezañ tizhet nemet ma n'eus ket re a ziforc'h barr-bevañ etre ar c'hendereoù (pezh a c'houlenn diorreerezh) hag ivez atebekaot izili pep kendere e buhez politikel hag armerzhel ar Stad.

"Tizhout ur seurt amkan ne vo ket aes rak gwasket e vo ar Stad diouzh un tu gant arbennigourion a c'houlennno beli hag aotrouniezh en abeg d'o barregezh hag ar stolloù a leuriado engroez al labourerion.

"Ar pal diwezhañ evidon eo tizhout ur reizhiad armerzhel a denno da hini Yougoslavia daoust ma n'eo ket peurvut seurt reizhiad e gwirionez (e-keñver buhezegezh zoken : o vezañ ma ro o lec'h d'ar c'hevezerezh ha d'an efederezh e c'hell ar rener, - dileuriet pe get gant e genlabourerion, - skarzhañ diwar skañv labourerion gozh h.a. na vint ket efedus a-walc'h d'e soñj).

"Meizañ a ran pegen diaes eo tizhout ar pal emañ o paouez menegiñ. Ha distreiñ a ran d'ar gudenn am boa meneget da gentañ : daoust ha ret eo kaout ur programm armerzhel resis a-raok dont dirak meno foran an dud ? Evel m'en deus X merket e-unan, a gav din, ne c'hellimp ober dirak ar bobl nemet gant luganoù diresis a-walc'h, karget avat a drivliadelezh. Pezh a welan eo e vimp lec'hiet er penn kentañ gant tud a vo bet stummet gant ar politikerezh gall, - ar pep brasañ eus ar boblañs, - en ur c'horn resis eus ar gennva politikel. ()

"Dislavar a vo en hon amkanioù e gwirionez. Sevel ur gevredigezh kevvarzhel a c'houlenn reolerezh strizh a-berzh ar Stad. Hogen hevelep reolerezh a vo enebet ouzh frankizouriezh Europa dre vras. Ha daoust ha n'hon eus ket ezhomm a sikour an Europa-se evit diorren Breizh ? Pe chom sac'het pelloc'h amzer en isdi-

orreadur ? Kv. an holl gudennoù o deus bet Alamaned ar Reter da ziskoulmañ : ret e vo derc'hel strizh ar boblañs, mirout outi a zivroañ, dre ret ?

"E Mur e komze Y eus ur moneiz dishual evit Breizh. Met pet bro o deus ur moneiz gwir dishual ? Ret e vefe studiañ ar broioù skandinaviat er c'heñver-se. Ne veajomp ket a-walc'h. Ne ouzomp netra da skouer diwar-benn ar broioù-se. Pe neuze asantiñ da vezañ un oaled speredel hepken evel Iwerzhon, gant ur barr-bevañ uhel a-walc'h d'ar re a vo chomet er vro ? Ret e vo dibab n'eus forzh penaos; en Iwerzhon avat ez eo bet an divroerezh un diskoulm d'ar gudenn armerzhel met war-bouez stagañ Iwerzhon ouzh ar bed saoz en deus miret ouzh an "oaled speredel" a c'hoari e roll gant efedusted." (05 03 68) EMVR-6

"Eun eo hol lakadenn-diazez : Breizh er framm gall zo kond-aonet d'ar marv; amplegad ret buhez Vreizh eo krouiñ ur framm brezhon. Talvout a ra al lakadenn-se evit pep tachenn : speredel, sevenadurel, kevredigezhel, armerzhel.

"Da heul, ez eus daou brantad en hon ober : 1) anataat al lakadenn dirak hor c'henvroiz b) krouiñ ganto ar framm brezhon.

"Eus Breizh Atao d'ar M.O.B., en deus an Emsav klasket dreist-holl anataat al lakadenn-diazez. Ni zo prederiet da gentañ gant krouiñ ar framm brezhon.

"Goude pemp bloavezh labour ez eus un egin a framm. Hogen sac'het omp gant ar skoilh-mañ : ne wel ket tud ar vro a) ez eo anat al lakadenn-diazez b) ez eo al lakadenn-diazez-se hon hini k) ez eo hor framm derou erounezidigezh al lakadenn-diazez.

"Evit a) emañ an dud tostoc'h eget n'int bet biskoazh, en arbenn eus an enkadenn grisoc'h eget n'eus bet biskoazh. Dre amañ ne zeu ket ar gouerion a-benn da werzhañ o eostoù na da dalañ zoken o c'hretadurioù : "N'eus nemet un diskoulm, emezo, Breizh atav".

"Evit b) ez eo splann n'eus ket bet prientet kalz a draoù. Ha ne gav ket din ez eo gwall skorus deomp ar pezh a voe aozet gant hon diaraogerion, evit an abegoù-mañ : skort e chomas bepred kelennadurezh kevredigezhel hag armerzhel B.A.; muioc'h a studi zo bet marteze gant ar M.O.B. ha dreist-holl gant an U.D.B., met o si bras eo bezañ sigotet al lakadenn-diazez.

"Evel just ne rankomp ket, ne c'hellomp ket forzh penaos, sevel en he holl vunudoù frammadurezh un armerzh brezhon diwar al lakaenn vroadel. Nemet e tleomp evelkent en em lakaat en hent, da lavarout eo digejañ un nebeut brastresoù o devo da gaout perzhioù mat diouzh tri savboent : 1/ broadel; anat e tleo bezañ warno ez int gallus en diskoulm broadel ha dic'hallus en diskoulm rannvroel 2/ kalvezel; poellek e tleint bezañ e-keñver an danvez a bleustrint warnañ; dorn an armerzhour a ranko tremen war an diskoulmoù armerzhel a ginnigimp zoken m'o c'hinnigomp en ur stumm brastresat 3/ koulzel; ne c'hallint

ket bezañ savet hep un anaoudegezh vat eus speredoù an dud er mare ma vint embannet; ur fazi e ve er c'heñver-se sevel a-du gant ar c'hengladekaet, zoken mar be broadeloc'h ha kalvezek-oc'h an diskoulm-se, en ur mare ma renfe er boblañs ul luskad a-du gant ar berc'hentiezh prevez.

"En ur ger, emañ a-du gant V pa lavar n'hon eus ket ni d' ober an dibab diwezhañ a-fet ar reizhiad armerzh a reno er vro dieub. A-du emañ gant Z pa lavar hon eus da heuliañ youl ar boblañs er c'heñver-se. A-du emañ gant V a-enep Z pa lavar V ez eo hon emell kentañ sankañ er speredoù an enebadur etre an diskoulm broadel hag an diskoulm rannvroel. A-du emañ gant Z a-enep da V pa lavar e tle hor c'helennadurezh armerzhel bezañ lakaet en he furm gant armerzhourion.

"Ar gudenn vras a chom anataat hol lakadenn-diazev dirak hor c'henvroiz, ha war ar poent-se omp holl ali moarvat." (18 03 68)

EMVR-7

"Daelet hon eus a-zivout ar ster a zo da reiñ d'an darvoudoù a c'hoarvez e Breizh. Loc'het hon eus diwar ar c'hentelioù Istor. E kentelioù S.A.D.E.D. ne vez komzet tost da vat nemet eus ar pezh a zo c'hoarvezet e diabarzh an Emsav ha c'hoazh alies n'eo nemet ur renabl eus ar strolladoù pe an darvoudoù o deus krouet. Biskoazh ne vez anv eus darvoudoù pouezus evit dazont armerzhel ar vro pe eus darvoudoù o deus kemmet dremm Vreizh. Un doare aon a ziskouez ar c'hentelioù-se rak ar vuhez anavezet gant kement annezad eus al ledenez-mañ. Ur geñveriadenn hon eus graet gant emzalc'h ar gomunourion, dreist-holl komunourion an 19^t ha derou an 20^t. An holl zarvoudoù a veze barnet ganto e-keñver ar pal o doa dibabet : savidigezh ar gevredigezh komunour. Ul lakadenn all a gemerent : ar broletaerion, pe gentoc'h renkad ar broletaerion he doa enni un nerzh politikel ramzel a oa da zizoleiñ. An nerzh politikel-se a oa evito keflusker an Istor. En un doare heñvel a-walc'h en deus an Emsav ur pal a ya kalz pelloc'h eget ar Stad Vrezhon : diorreidigezh ur gevredigezh kevarzhel e Breizh ha keit hag ober er bed a-bezh. E-keñver ar pal-se e c'hellomp barn un darn eus an darvoudoù a zo c'hoarvezet e Breizh adalek derou an Emsav. Da zeskiñ hon eus penaos barn an darvoudoù a c'hoarvez bemdez e Breizh bremañ. Kemer a rin ur skouer : e kornioù 'zo eus Breizh ez eo en em vodet ar gouerion evit labourat a-gevret ha pourchas da bep hini an amzer da ober traoù all eget mediñ pe sevel chatal. Lavarout a ran ez eo emsavel an dra-se. En hevelep doare e c'haller lavarout e oa emsavel al labour kaset da benn gant armead ar skolaerion e Breizh e derou ar c'hantved : uhelaet o deus barr deskadurezh an dud ha digoret Breizh d'ar bed (mont a ran pell ha ne zifennin ket ar savboent-mañ gant kalz nerzh, met un evezhiadenn a rin evelkent : pa ne oa ket barrek an Emsav da lakaat war sav un deskadurezh vroadel e brezhoneg e oa gwelloc'h

d'an dud gounit deskadurezh e galleg eget na c'hounit tamm ebet). Menegiñ a rae X warlene an nerzh ramzel a zo er bobl vrezhon hag ivez ne ouie ket ar bobl vrezhon e oa an nerzh-se enni. Bennozñ d'ar gremm a c'hell kenderc'hañ e vo tu da dizhout paliou a hañval bezañ ken pell ha pal an Emsav.

"Rebechet ez eus bet deomp, ha rebechet e vez c'hoazh, ober fae war gement labour na reomp ket. Gwirionez ha gaou a zo er rebech-se. Graet en deus X anv eus ar boaz en deus W da deurel buan tud'zo en deñvalijenn diavaez. Aes eo kompren an emzalc'h-se pa n'hon eus ket kavet an doare da varn an darvoudoù hag an oberiezhoù. Aliès e lavaromp : an dud-se a zo o vont da ober un dra bennak a vo ur c'hwitadenn en diwezh. An hevelep emzalc'h o deus bet an darn vrasañ eus ar gomunourion pa'z eo bet savet Kumun Paris e 1870. MARX avat, daoust m'en doa lavaret e oa re abred evit en em sevel hag e c'hwitfe an afer dre ret, en deus strivet pa'z eo tarzhet an traoù da reiñ kalon da dud ar Gumun ha d'o skoazellañ diouzh e wellañ. Tagañ a rae ar re a lavare e oa droch-mik Kumun Paris ha tennañ a rae kentelioù eus an taolioù arnod evit an dazont. Eus ar pouezusañ eo bet an dezrann en deus graet eus arnodoù Kumun Paris evit dazont al luskad komunour. Ur sell yael hon eus da gaout ni ivez." (27 04 68)

EMVR-8

"Pezh a zo c'hoarvezet e Karaez [1] n'eo ket diot tamm ebet : ur ster resis o doa an tabutoù etre tud ar C'huzul ha tud S.A. D.E.D. ha reizhpoellek eo pezh a zo disoc'het diouzh ar rendaeloù. Tud S.A.D.E.D. a oa a-du dre vras, met kalz eus ar re all n'o doa komprenet netra. Dreist-holl n'o doa ket komprenet, ha ne gomprenont ket c'hoazh, ez eo politikel ar gudenn, e tle an emsav sevenadurel bezañ renet gant ar bolitikerion, evel e pep bro. Setu perak ez eus tud o lakaat pe o klask lakaat war gont S.A.D.E.D. pe Emsav an dizurzh a zo o ren en o zouez. Adlavarout a ran ne sell ket ouzhimp war-eeun pezh a c'hoarvez er C'huzul, met an tamalloù [2] graet ouzh S.D.V. a sell ouzhimp evelato en un doare resis.

"Peseurt emzalc'h kaout dirak an tamalloù-se ? Tu zo da lavarout eo didalvoud an tamalloù graet ha neuze nac'h plediñ ganto e nep doare. Da'm soñj din-me d'an nebeutañ eo arvarus lezel an tamalloù-se da redek rak gallout a reont ober droug ha diaesaat da dud 'zo dont d'an Emsav ().

"Kement-mañ ivez en deus ur ster hollek : () ar gevredigezh kozh a zo e Breizh a glasko betek ar penn diwezhañ en em zifenn en ur sevel ur voger en-dro d'an Emsav. Ne c'hellomp ket lezel sevel ar voger-se en-dro deomp. Setu perak evidon n'eo ket a-walc'h frammañ an Emsav en diabarzh. Ret eo ouzhpenn diskleriañ muioc'h hon emzalc'h ha ster ar pezh a reomp, dre skrid ha dre gomz." (19 04 68)

EMVR-9

[1] Anv a ra al lizher amañ eus Bodadeg Veur Kuzul ar Brezhon-
oneg dalc'het e Karaez d'ar 01 10 67, sl. Emsav 12/324.

[2] Sl. Emsav 17/148.

"Strafulh a zo en "Emsav sevenadurel broadel" en abeg d'an Devezhioù Studi a zle bezañ graet e miz Eost gant Skourr an Deskadurezh. Hervez darn ho poa da zibab an deizioù lezet vak gant ar c'hevredigezhioù sevenadurel broadel. Na bihan ar vromañ ! Darn a ya pelloc'h zoken, o lakaat en ho kiriegezh an dizurzh a zo en "Emsav". Me 'gav din edo dija an dizurzh-se o ren pell a-raok S.A.D.E.D. en emsav evit ar yezh. Hag an abeg anezhi zo aes da gompren : setu ugent vloaz ma klaskas an Emsav repu en ober yezhel, hag un tamm mat anezhañ a zo bepred e-barzh. Petra ober en ur repu, nemet huñvreal ? Siwazh ! m'o devez an oberoù poan alies oc'h en em geitañ, an huñvreoù ne reont nepred. Anaoudegezh vat hon eus evit an dud a ouezas kafunañ regez an Emsav dindan ludu ar stourm "sevenadurel". Met echu eo, mougañ a raint holl en o zoull ma ne zeuont ket er-maez, ma ne gemeront ket perzh da vat en Emsav war e wir dachenn, an dachenn bolitikel.

"Me oar, kenderc'hel a reont da ispilhañ medalenn o broadelouriezh ouzh o forpant evel ma ra ar soudarded kozh, ha mallozh-
iñ ar rannvroelourion. Dre gustum eo avat : heuliet em eus gant aked emzalc'h Kuzul ar Brezhoneg dirak ar Charte Minimale, ar vi diwezhañ dozvet gant ar struskañval rannvroelour. Hini ebet eus an izili ned eo savet a-enep, hag un darn o deus sinet anezhi. ()

"Ho mennad adalek an derou eo en em reizhañ diouzh ur pal politikel. Ar pal-se, ar Stad Vrezhon, a hañval dija bezañ nebeutoc'h dreist diraez en Ebrel 1968 eget na hañvale en Ebrel 1963. Kendalc'hit start gant an hent eeun-kaer hoc'h eus dibabet. Ul labour ramzel hoc'h eus sammet, met gouzout a rit ez eo ramzel, ha mar padit evel m'hoc'h eus kroget e teuot a-benn eus ho taol hep mar ebet". (30 04 68) EMVR-10

"N'hon eus Stad ebet evel just, ha n'hon eus ket ar gwir da skoulmañ darempredoù gant ar riezoù all c'hoazh en anv ur riez vrezhon; n'omp ket aotreet c'hoazh da c'houlenn digant ar boblañs kemer lec'h er goudor stadel n'en deus ket an Emsav savet e Breizh. Met adalek ar mare ma'z eus un Emsav o komz en anv ar Stad da zont, e rank an Emsav-se kenfurmiñ e obererezh a-bezh, - ha neuze e zaremprederezh, - diouzh ar gefridi en deus sammet. Rankout a ra nac'h kaout darempredoù kefridiel da skouer gant ar Stad sujer ha gant galloud ebet na anavez ket da Vreizh ar gwir da vezañ ur Stad vroadel." (25 04 68) EMVR-11

DANEVELLOU OBEREREZHDigant ur c'helenner eus Kelc'h Debauvais Paris

"Ret eo anzav eta ne ra ket berzh ar vroadelouriezh em rummad. Setu un nebeut abegoù, da'm meno :

1. An dregantad a C'hallaoued : 40 %.

"Fall e c'hell bezañ kaout Gallaoued en hor skol. Gallaoued ha Breizhiz a c'hell sevel a-enep da vennoziou an Emsav, moarvat, hogen zoken mar'd eo an hevelep arguzennoù a vez ganto e ranker ober un diforc'h.

"Ar C'hallaoued a sav a-enep o vousec'hoarzhin : ar vroadelouriezh a hañval dezho bezañ un huñvre moarvat, hogen, forzh penaos, ne sell ket outo.

"Breizhiz a hañval bezañ heñvel o emzalc'h, hogen o abegoù donañ zo disheñvel : adalek an deiz m'en deus kroget ur Breizhad da zaremprediñ an Emsav e sant emañ en arvar, gouzout a ra e vo goulennet digantañ un dra bennak. Evel reizh, n'eo ket anavezet gantañ en doare-se. Gwell e ve lavarout e sant an dra-se dre vondoug.

"D'an deiz ma krog ur Breizhad da zaremprediñ an Emsav, emañ krog ennañ an "dispac'h diabarzh". Enebiñ a ra ouzh mennoziou an Emsav peogwir ez eo ret-holl dezhañ gouzout ha prouiñ ez int diboell, rak a-hend-all... e vo ret dezhañ o degemer, h.a.

"Dre-se, an dael etre daou Vreizhad hag an dael etre ur Gall hag ur Breizhad a vo disheñvel-krenn. Dre gemmeskañ Gallaoued ha Breizhiz e vezer en arvar da na c'hallout arverañ an diforc'h-se, en arvar e vezer e kendalc'hfe Breizhiz da enebiñ pe da zaelañ ouzh ar vroadelourion en un doare gall, eleze ne vefe ket tu da anataat ha da gorvoiñ o abegoù donañ, disheñvel ma'z int diouzh re ar C'hallaoued.

"Dre ma'z eus un diforc'h hennadel etre arguzennoù Breizhiz ha re ar C'hallaoued e rank bezañ disheñvel emzalc'h ar broadelour hervez ma komz ouzh ur Gall pe ur Breizhad : gwall ziaes eo henn ober en ur gevredigezh evel K.D. ma kaver enni Breizhiz ha Gallaoued.

2. An doareoù dibabet gant K.D.

"Kinniget hon eus K.D. evel ur skol, hag ur skol hepken, ganti reolennoù strizh. Sentiñ a ra ar skolidi ouzh ar genurzh ha labourat a reont mat. Kinniget hon eus K.D. evel ur skol vrezhonek distag eus nep politikerezh : arabat eo bezañ souezhet na glaskfe ket ar skolidi kaout muioc'h eget kentelioù war ar yezh. Marteze e vo ret deomp adwelout hon doare d'ober bruder-
ezh K.D..

3. Kefredourion e vez an dud dastumet gant K.D.

"Ar re-se o devo o flas er framm gall; evit e gaout e labouront. An Emsav, al labour sevel ur framm brezhon a vo evito bezañ en arvar. Ne gaver ket seurt kudenn gant ar re a zo tud vunut er

framm gall : ne gollont ket kalz a dra ouzh e guitaat hag ar spi o deus da gaout ur plas gwelloc'h er framm brezhon.

4. Ar pevare abeg a zo bet komzet diwar e benn e Mur. Ober a reomp gant an hevelep gerioù, hogen ur ster disheñvel a roomp dezho. Da skouer "nationaliste" pe "révolution". Evit ur Gall, ar ger "nationaliste" a dal "unan eus an tu dehou pellañ", hag ar ger "révolution", "tan ha gwad e pep lec'h".

"Kudennoù pleustrek eo kement-se.

"Dre m'omp-ni broadelourion, e roomp d'ar brezhoneg e dalvoudegezh wirion, un dalvoudegezh vroadel, dre-se marteze omp techet da grediñ e teu an dud d'ar brezhoneg dre m'en deus evito an hevelep talvoudegezh hag evidomp.

"Eeunaet kalz, ar gudenn a zo houmañ : ha dont a reer d'an Emsav dre ar brezhoneg pe, en tu kontrol, daoust hag-eñ e teuer d'ar brezhoneg dre ar mennoz broadel ?" (02 68) EMVR-12

LENNADENNOU

Yvon LE VAILLANT, Les fellagha bretons, Le Nouvel Observateur 180/5 24-30 04 1968.

E dibenn miz Ebrel ne oa ket tu da gavout ken e Roazhon Le Nouvel Observateur, en abeg d'ar pennad Les fellagha bretons embannet warnañ.

Talvoudegezh ar pennad-se zo bet da gentañ diskouez ez eus ur gudenn e Breizh. LE VAILLANT a ro d'e lennerion sifroù a sell d'an armerzh, stad ar gourc'hwel da skouer, live ar gopr.

Met e bennad n'eo ket ur studiaden armerzhel. "Le 'mouvement breton' est en plein bouillonnement", setu ar pezh a fell dezhañ diskouez, da lavarout eo e ra un doare renabl eus an dud hag ar strolladoù o deus gwelet e oa ur gudenn e Breizh hag a glask he diskoulmañ.

Ar gudenn-se n'eo ket meizet en hevelep doare gant an holl. Setu perak ez eo disheñvel an diskoulmoù kinniget pe an enklaskoù a vez renet evit kavout un disoc'h.

Strolladoù 'zo a chom war an dachenn armerzhel : C.E.L.I.B., C.A.B.R.O. hag an aozer a zispleg ez eo diaes dezho mont war-raok dre ma nac'hont gwelout ar gudenn bolitikel a zo dindan an diaesterioù armerzhel.

Ar c'hweluniadoù a glask da gentañ unaniñ holl labourerion Vreizh : micherourion, kouerion, kefredourion. Er c'heñver-se e not ar pennad e c'hoarvez er mare-mañ "kejadennoù a c'hell bezañ tarzhus", anv a ra eus un "talbenn brezhon", eus an aon en deus ar gouarnamant gall rak hevelep unanidigezhioù.

Ar strolladoù evel U.D.B., Bretagne et Démocratie, Club Breton, o deus diazezet o labour, o bruderezh war ar ger-stur : "diorren Breizh, rannvro Frañs" hag, hervez o dibaboù politikel

levezonet gant ar strolladoù gall a gleiz, ar P.S.U. dreist-holl, e komzont eus "rannvroelaat demokratek ar riezoù".

Div linenn bennak a ya ivez gant S.A.D.E.D., a ve o klask "kas da benn un doare dispac'h sevenadurel" en ur "dreiñ skridoù Mao ha Guevara".

Gouestlet ez eus un darn vat eus ar pennad d'an F.L.B., d'an tarzhadennoù, d'an aergelc'h a grouont e Breizh, da emzalc'h an dud dirak an darvoudoù-se.

Perak e vez lakaet bombez gant "tud an F.L.B." ? Difraezh e chom ar respont. Goulenn a rafent ma ve azgwelet ar gevrat etre Frañs ha Breizh, met ne zeu netra resisoc'h gant ar c'hazetenner.

Merkañ a ra koulskoude pegen niverus ez a an dud e Breizh a vez ez int Brezhoned da gentañ holl, a venn en em ren evel Brezhoned, ha ren traoù Breizh en un doare a-ziforc'h.

Krediñ a ra ouzhpenn-se diskouez n'eo ket an F.L.B. un degouezhadenn diwar-c'horre n'en defe dason ebet er vro, met ur strollad ez eo kentoc'h a ro da anaout en un doare trouzusoc'h eget ar re all ez a fall an traoù e Breizh.

Koulskoude, daoust ma tiskouez Yvon LE VAILLANT kenhoalañ gant Breizhiz oc'h emsevel, e tremen pell diouzh kompren emzalc'h pobl Vreizh en e zonañ. Aze ez adkaver ar Gall, ha pa ve eus an tu kleiz.

Da skouer ne intent grik en doare o deus Breizhiz da vouezhiañ. Votiñ a reont a-du gant gouarnamant de GAULLE goude bezañ emsavet a-enep d'ar gouarnamant-se c'hwec'h miz a-raok. Skort eo kentoc'h an displegadurioù a ro d'al lennerion : disfiz e ve ouzh ar "politikerezh", "enepkomunouriezh atizet gant an Iliz katolik", hag evel just ar poz lennegel gall war an temzpered brezhon - kelt, "ar meskad-se kevrinus a idealegezh foll hag a realegezh yen". Penaos diskleriañ neuze e c'hoarvezas an hevelep tra en Algeria dispac'het ? Tostoc'h ez ae a dra sur MEMMI ouzh poell an emzalc'hioù-se. Ra adlenno kleiziz c'hall Portrait du Colonisé. Hag ankouaet o defe ez eo ar mouezhiadegoù unan eus binvioù klasel bremañ ar galloudoù sujer da stourm ouzh ar pobloù suj emsavet ?

A-hend-all e roenklasker N.O. un hevelep pouez pe dost d'an holl strolladoù, ha dreist-holl ne zisrann ket anezho diouzh ar strolladoù gall : goude ezrevell C.E.L.I.B., M.O.B., U.D.B., e tremen gant Bretagne et Démocratie, Club Breton, ez en em gav distroñs-kaer gant ar P.S.U. hag e ligan eus ar mare : "didrevadennañ ar proviñs". Ned eo ar gudenn vrezhon nemet ur gudenn diabarzh gall. Pa vo roet labour da Vreizhiz, un nebeut frankizioù d'ar muiañ, ne vo ket mui a gudenn.

Anat eo ez a kenhoal an aozer gant an "ober rannvroel araokadour". Ne fell ket dezhañ soñjal ez eus ur gudenn a vroadelezh. "Dañjerus e ve d'ar 'Mouvement Breton' bezañ alcubet gant pellaourion". Ar gwellañ e ve kaout ur strollad breizhat, gant an talbenn dispac'helour mar karer, ennañ izili vreizhat hepken, met o c'hoari evel just er vuhez politikel gall.

Hejañ ar banniel brezhon (unan end-eeun a weler luc'hskeudennet-kaer war c'holo N.O.) zo evit kleiziz c'hall un doare all da lavarout d'o gouarnamant : "Gwelit, n'oc'h ket evit diskoulmañ ar gudenn-se. C'hwitañ a rit war an dachenn-se ivez. Ganeompni emañ al louzoù : ar rannvroelouriezh demokratel".

Degemeret mat eo bet ar pennad-se e Breizh, n'eo ket moarvat dre vertuz ar gleizelezh c'hall, met peogwir ez eo ar wech kentañ moarvat ma teu ur gelaouenn vras da astenn ar meleziour dirak pobl Vreizh. Ha Breizhiz zo marnaoniek er mare-mañ da c'houzout keloù diwar o fenn o-unan; ar bobl-se, manet abaf e-pad keid-all, en em gav a-benn ar fin c'hoantek-holl d'en em anaout.

Hag en em anaout madik a-walc'h er skeudenn disvannet dezho gant pennad N.O.. Ur sell diwar-c'horre en deus taolet warno ar Parizian, met emaint c'hoazh e par an diwar-c'horreoù evit a sell ouzh en em anaout. Diskouez a reer dezho pegen difraezh, pegen luziet e chom ar mennoziou e Breizh. Ar frazenn aroueziusañ eo marteze houmañ : "On ne sait pas où l'on va, mais il risque d'y avoir du grabuge" eme an den war ar straed.

Moarvat ne chomo ket Breizhiz gant ur skeudenn dispis anezho o-unan. Ha ken youlek ez int d'en em saveteiñ ha ma'z int youlek d'en em anaout. Piv avat zo prest da reiñ dezho un anaoudegezh hollek, fraezh ha kempoell eus o c'hudennoù ? Piv a ziskouezo dezho petra ober ? Ur wirionez a chom : ma ne oar ket an dud da belec'h ez eont, ez eo d'an Emsav heñchañ anezho. (04 05 68)

EMVR-13

DARVOUDOÙ

Gallaoued o tizoleiñ Breizh

Dindan an istitl "Lennadennoù" e ve bet renket ar pennad-mañ kenkoulz-all. Ne vo ket kammlec'hiet evelkent mar en lakaomp dindan istitl "Darvoudoù", rak un darvoud eo an evezh a daol a-zevri Gallaoued 'zo ouzh kudenn Vreizh er mare-mañ.

En-dro d'an Emsav frammet, emouiziek, e kroz dre ar vro a-bezh ur gourdrouz a emsavadeg na c'haller ket lavarout anezhañ e teu eus an Emsav, na c'haller ket lavarout kennebeut ez eo estren d'an Emsav : dont a ra eus an hevelep andon istorek hag an Emsav, met dispis, diemouiziek, diframm ha dibal e chom, setu perak e tere outañ an anvioù a Emsav emdarzhed, Emsav gouez.

Mat eo studiañ penaos e tazgwered Gallaoued ouzh an dihun-se. Ar pennad embannet gant ar c'hazetenner gall Yvon LE VAILLANT war Nouvel Observateur zo dezrannet amañ diagent, hag eñ eo a gemerimp da skouer eus an emzalc'h nevez a spurmanter e gennadoù 'zo eus ar bed politikel gall.

Un emzalc'h doujus mar bez ouzh Breizh hag hec'h Emsav. Klaskomp kompren petra 'zo e-barzh.

Da gentañ, e kaver amañ un arouez eus emdroadur ar gostezenn gleiz c'hall nannkomunour war-du un doare rannvroelouriezh nevez a glask he sichenn en "demokratelezh lec'hel". Labour armerzhourion evel PHILIPONNEAU, levezon levrioù LAFONT en Okitania, - e-touez re all, - a zo e devoud an emdroadur-mañ a en em ziskouez ivez e savlec'hiadurioù politikerion c'hall a-gleiz evel MENDES-FRANCE.

An eil dastumenn a c'haller tennañ eus studi an emzalc'h-se eo ez eo krog ar C'hallaoued, - darn anezho da vihanañ, - da emouezañ ouzh emgav rakzispac'hel Breizh er mare-mañ. Kemer a reont - betek gouzout - an emgav-se a-zevri.

D'an trede, emañ gant darn eus kleiziz c'hall an damspi da gorvoñ enkadennoù a seurt gant an hini a zo o c'hoñ e Breizh abaoe un nebeut bloavezhioù a-benn diskar gouarnerezh de GAULLE en o bro.

Ar goulenn nemetañ a c'hellomp ober eo hemañ : ha gouest eo an Emsav a-benn bremañ da dennañ e vad eus seurt skoazelloù forc'hellek o tont eus kamp ar galloud sujer ? Daoust ma'z eo gounidus evidomp an emzalc'h nevez-se a-berzh kleiziz c'hall nannkomunour e ve arabat kontañ e vo a-walc'h dioutañ e-unan evit reiñ sikour bras deomp. Warnomp hon-unan da gentañ e tleomp en em harpañ.

Disheñvel-krenn eo degouezh Bretagne Nouvelle embannet gant ar Strollad Komunour Gall. Renerion ar gelaouenn nevez-mañ, en enep, a zalc'h da hengoun gall o c'hostezenn diazezet en hor bro diwar an eil brezel-bed.

Un devoud eo e voe ar gomunourion betek-henn e touez reutañ dalc'herion ar sujerezh gall e Breizh. Heverk eo eta o gwelout o wiskañ al liv brezhon a-greiz-holl. Al liv ? Un arliv kentoc'h hag unan gwall skañv. Bodad skridaozañ ar gelaouenn, goude bezañ graet meneg er pennad-digeriñ eus ar "cinq départements de la région Ouest", a zilez kerkent war ar pajennoù all framm Breizh istorel evit en em enkañ e bevennoù ar Ranndir Steuñvel Bretagne. Daoust da anv ar gelaouenn, ne reer meneg ebet eus yezh ar Vrezhoned ha nebeutoc'h c'hoazh evel o yezh vroadel (daoust ma kemenn-er abadennoù-diduellañ e brezhoneg, da lakaat war an hevelep pazenn hag an abadennoù gitar roet gant ar P.C.F. e lec'hioù all). Ouzhpenn-se, e-ser argadoù an F.L.B. e klasker teurel an dismegañs war an Emsav dre e stagañ ouzh koun an dalc'hidigezh alaman, - war ar poent-mañ emañ P.C.F. hag U.N.R. dorn-ouzh-dorn, notomp mat.

Embannadurioù seurt Bretagne Nouvelle n'int eta nemet binvioù arveret e Breizh gant ar C'hallaoued, komunour pe get, a-benn lakaat ar Vrezhoned da gousket ha mirout outo a gerzhout gant an hent broadel emaint o treiñ war-du ennañ bremañ. N'eus anezho en diwezh nemet un azon eus emdroadur ar meno foran en hor bro : damveizañ a ra ar gomunourion, ar c'haollourion, h.a., ez eus un emskiant pobl o tiwanañ e Breizh, dreist-holl en enkadenn a zo o reuziañ er mare-mañ, ha klask a reont korvoñ an dihun-se

evit mad ur strollad gall pe unan all.

Daoust ha lec'h zo c'hoazh e Breizh d'un "emsav sevenadurel" ampolitikel ?

Emdreifiñ a ra buan ar saviad e Breizh. Emdarzhhek e chom an emdroadur-se betek-henn. En ur stad a "Emsav gouez" emañ c'hoazh al luskerioù anezhañ. Displegadegoù ar c'hweluniadoù koulz ha luskad an armerzhelourion n'int ket emouez ouzh ar pal a hir-aezhont dezhañ. War ul live all e chom an F.L.B., anezhañ ul luskad emdarzhhek ivez, dre ma tenn hepken e argadoù da vrudañ keal ar vroadelezh hag an dishualded hep kinnig ur framm d'ar boblañs. Seurt embregadennoù liesneuz a ziskouez evelato emañ Breizh o skeiñ etrezek un torradur politikel a gemmo dremm ar vro n'eus forzh penaos.

An emgav nevez-se hon degas da c'houlenn adarre ha gant muioc'h a nerzh petore lec'h a chom e Breizh d'an "emsav sevenadurel" ampolitikel. Krochedoù a lakaomp en-dro d'ar gerioù "emsav sevenadurel", rak al luskadoù na gemeront ket pal klok, stadel, an Emsav ne oufent ket bezañ emsavioù, rak ar sevenadur zo politikel dre anien, hag un enepster e ve komz eus 'sevenadur ampolitikel'.

Al luskadoù a ra an "emsav sevenadurel" ampolitikel, ha pa vent a orin ledemsavel evel Engleo Breiz, pe a orin emsavel evel Kuzul ar Brezhoneg, a gav o diazez er gredenn ne vo tu biken da gaout ur gouarnerezh brezhon er vro-mañ, - nemet marteze war hir dermen en tu-hont d'ar rummad a zo e barr an oad hiziv, en un dazont koumoulek eta. Disoc'h heboell ur seurt kredenn eo e ranker degemer ar gouarnerezh gall ha klask sachañ digantañ un nebeut aotreadennoù a roy tu da Vreizh da virout he yezh hag ul lod eus he stuzegezh henvoazel. Dre e natur ez eo eta an "emsav sevenadurel" ul luskad kempennour.

Lavaret hon eus c'hoazh fazioù hevelep kempennouriezh. Ar fazi kentañ eo ar spi da vezañ efedus : pedennoù ar gempennourion ne ziframmint netra digant ar galloud dalc'her. Petra zo disoc'het eus goulennadeg Engleo Breiz ? Petra a zisoc'ho eus stourmadeg ar Charte Minimale kaset war-raok gant ar C'hoursez ha marteze warc'hoazh gant Kuzul ar Brezhoneg ? Gwechall moarvat en doa an "emsav sevenadurel" un digarez : krediñ a rae e c'hallfe un tamm kelennadurezh eus ar brezhoneg er skol mirout an teodyezhoù henvoazel bev war ar maez; en amzer-se ivez e rene ar gredenn ne oa tu ebet da ziazezañ ar yezh unvan arnevez hep harp an teodyezhoù-se. Hogen piv a gredfe hiziv asuriñ e c'hell div, teir, peder eurvezh kelenn ar yezh e skolioù Breizh saveteifiñ nep brezhoneg bev ?

Faos eo enta tezennoù-diazez an "emsav sevenadurel" ampolitikel. Ha grevus eo heuliadoù ar faoster-se. Rak dav eo e guzhat. E guzhat a reer a-dreñv latar an trivliadoù peurliesañ. Ar santadoù mat a gemer lec'h ar poell e sol ar mennadoù. Gouzout

a reer ne dreuzvevo ket ar brezhoneg er stad politikel o ren, hag emeur a-du gant an emrenerezh. Hogen, o vezañ ma kiler rak diawel an dispac'h, e reer van da grediñ hag e kreder a-benn ar fin ez eus un hent d'an emrenerezh, pe da nebeutañ da silvidigezh ar yezh pe d'ur gwelladur all bennak, o tremen e-biou d'an dispac'h. Seurt gweadenn er mennoziou hag er gerioù avat ne c'hell bezañ graet nemet diwar-goust ur gwariadur eus ar reizh hag un didalvoudekadur eus al lavar. En diwezh ne ouzer mui diwar-benn petra resis e komzer, hag e ouzer nebeutoc'h c'hoazh petra'zo d'ober.

Ouzhpenn bezañ diboell ha diefedus, ez eo an emzalc'h-se arvarus evit an Emsav. Rak pa lavarar, - ur wech degouezhet e penn ar giladenn, - ez eo gwell diskoulmañ "kudennoù Breizh" dre en em glevout gant ar galloud sujer, e tispenner diazezoù ha luskerioù an emgann evit ar Stad vroadel. O vezañ ma tegemerer ar gouarnerezh gall e teuer, dre ret, da vezañ e gevredad er stourm en devo da gas a-enep d'an Emsav stadel. D'an deiz ma ne c'hell ket mui ar galloud dalc'her chom hep disprizout a-grenn arc'hadurioù ar boblañs dalc'het, e vo laouen-bras o kavout war e hent ar gendivizerion fur a vo prest d'en em glevout gantañ ha da argas mennad ar Stad vroadel gant ma vo graet, lakaomp, un tamm kelennadurezh divyezhek er skolioù.

Amañ e krog ar bratellerezh. Rak an aluzon-se ne vo gouest biken da saveteiñ ar yezh en degouezh a-neuze, hini ar sujidigezh o kenderc'hel, - dre ma viro ouzh ar bobl a emouezañ ouzh he broadelezh, ha se kalz asuroc'h eget er mareoù ma ne veze ket kelennet ar yezh, o vezañ ma vo aet houmañ d'un elfenn er reizhiad sujer e-lec'h bezañ evel bremañ un arm a-enep dezhi. Ha dre ma ne emouezo ket ar bobl ouzh he broadelezh ne c'hell ket kennebeut mirout ar yezh.

Ar Stad hepken a c'hell krouiñ ha mirout an emskiant vro. Hogen, dres, dre genlabourat gant ar galloud sujer e nac'h an "emsav sevenadurel" ampolitikel degemer d'e hini mennad an Emsav stadel. Ret eo gwelout avat ne c'hell mennad an Emsav stadel ober berzh nemet mar leuriad ar bobl a-bezh. Hep unvaniezh splann ar bobl en-dro d'ar mennoz broadel ha, dre-se, d'an Emsav stadel, ne c'haller sevel Stad vroadel ebet. Nep luskad eta a glask kempenn kudenn Vreizh e framm ar Stad C'hall, - ha pa ve da c'hortoz, war e veno, - a vratell mennad an Emsav dieubiñ a zo ober eus pobl Vreizh ur bobl dishual e-touez pobloù ar bed.

Eus kement-se holl petra dezastum ? An dra-mañ : an Emsav ne c'hell ober berzh nemet unanet hag unvan e ve. Ret eo er mare-mañ kreizennañ holl nerzhioù an Emsav en-dro da geal ar Stad. Da lavarout eo e tle an Emsav adal bremañ bezañ dieub diouzh beli ar Stad C'hall, - dianaout a-grenn ar Stad C'hall en e holl zarempredoù kefridiel, - hag ober dave e kement a ra d'ar Stad Vrezhon da sevel. (05 05 68)

KEMENNADENN A-BERZH SKOURR AN DESKADUREZH VROADEL

Degouezhet ez eus gant Skourr an Deskadurezh Vroadel ur c'hlemm a-berzh an Ao.Y.TALBOT, Kadoriad Kuzul ar Brezhoneg. An abeg eo ar mare dibabet gant S.D.V. evit aozañ Devezhioù Studi Eost 1968. O verkañ an deiziadoù, n'en defe ket S.D.V. dalc'het kont eus an deiziadoù a oa "kemeret" endeo gant ober-enoù 'zo eus Kuzul ar Brezhoneg.

Kerse eo gant Skourr an Deskadurezh Vroadel respont ned eo ket degemeradus klemm Kuzul ar Brezhoneg. Displegañ a ra perak.

Unan eus an aozadurioù kevreet hiziv e-barzh Skourr an Deskadurezh Vroadel, S.A.D.E.D., a voe ezel eus Kuzul ar Brezhoneg etre ar 06 09 64 hag an 30 11 67. Ne bacuezas nepred S.A.D.E.D. a embann e oa politikel ar pal a gemere, hag e termene ar pal-se evel savidigezh ar Stad Vrezhon. Da ziazez e obererezh e lakae ar reolenn e tle ar stourm evit ar yezh bezañ kaset dindan renerezh an Emsav politikel.

S.A.D.E.D. a roas e zilez eus Kuzul ar Brezhoneg en abeg d'an dizemglev a oa war ar poent-se etrezañ ha Kuzul ar Brezhoneg.

Mennad S.A.D.E.D. o vont er-maez eus K.A.B. ne oa e nep doare dibriziañ al labour renet gant an oberenoù bodet ennañ, met hepken diskouez e oa disol an doare ma oant bodet, o vezañ ma ne denne ket an doare-bodañ-se d'o lakaat war ziazez gwirion an ober yezhel ha sevenadurel, da lavarout eo war un diazez politikel rakstadel.

Keit ha ma chomo Kuzul ar Brezhoneg hep an diazez-se ne c'hallow bezañ anavezet dezhañ beli ebet en Emsav stadel. Koulskoude ez anavez Skourr an Deskadurezh Vroadel da bep hini eus izili Kuzul ar Brezhoneg ar gwir da c'houlenn diskleriadurioù war an doare ma ren S.D.V. e obererezh. Setu perak ez eo endalc'het da reiñ d'an Ao.Y.TALBOT ar respont-mañ :

A-hed ar bloaz e vez dalc'het gant Skourr an Deskadurezh Vroadel etre 5 ha 10 emvod kefridiel, etre 60 ha 100 emvod amgefridiel bep miz. E miz Eost, ar mare ma c'hell an darnvuiañ eus al labourerion bezañ dieub e-keñver micher-vevañs, e taougement an niveroù-se. Betek 1967 ez ae un darn eus labourerion an Deskadurezh Vroadel da gKamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion da reiñ kentelioù ha da stummañ skolidi, da aozañ emvodoù ha dalc'hioù-labour diseurt, da ren kendaeloù. Diwar 1968, goude kendivizoù nevez etre an daou aozadur, e vo renet distag labour Skourr an Deskadurezh Vroadel ha Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion.

Prest eo bepred S.D.V. da gendivizout gant an aozadurioù brezhon all ha da ren ganto ur c'henlabour war ziazezoù termenet spis. An diazezoù-se ne c'hallint ket evel just dianaout pal hollel an Emsav a zo savidigezh ar Stad Vrezhon. (05 05 68)

N O T E N N O U A R M E R Z H E L (1 5)

AR MONC'HWEZH

An digempouezioù e reizhiad ar moneiz.

Keit ha ma vez en amred ur moneiz-metal pe ur moneiz-paper eiltaladus, ez eo aes a-walc'h derc'hel ar reizhiad e kempuez. Adalek ar mare avat ma teu ar moneiz-paper da vezañ dieiltaladus, e tiouerer an eeunañ doare da recliata kas ar monañ ha, dre-se, kementad ar moneiz en amred, a anver c'hoazh ar monadur. Emañ neuze ar moneiz e silwink, hag en arvar da droc'holiañ pe, evit ober gant ar ger en arver, da c'hwezhañ; c'hwezh ar monadur eo, anvet c'hoazh monc'hwezh, monc'hwezhañ, monc'hwezhadur hervez ezhommoù an displegañ.

Mon dezvel ha mon ret

Uheloc'h (Emsay 15/86,89) hon eus displeget ster an termenou-se. Gant ar mon dezvel ez eo rediet gwerzhourion ha kredourion da zegemer e stumm moneiz an arc'hant dleet dezho hep ma ve usvevenn ebet d'ar yalc'hadoù talet. Ar moneiz dezvel avat a c'hell bezañ eiltaladus pe dieiltaladus; en degouezh-mañ diwezhañ e komzer eus mon ret.

Da gentañ ne voe ar mon ret nemet ur gwallzarvoud e buhez ar riezouù : divizet e veze da geñver an enkadennoù politikel pe armerzhel, pa zoujed na zeufe an dalc'herion vilhedoù an holl war un dro da c'houlenn eiltaladur, - a-benn reiñ d'ar bank-monañ amzer da ad-piaouañ e liñveladoù hag e-se e ziwall diouzh ar faezhadur. Met an abeg pouezusañ o doa ar riezouù da ensaviñ ar mon ret oa an ezhomm mallus da greskiñ o barregezhioù en ur mare amjestr, da geñver ur brezel da skouer.

An holl vroioù koulz lavaret o devez roet mon ret d'ar moneiz-paper, pe e-pad prantadoù amzer, pe hep distro. Frañs eo a stagas an hini gentañ gant an embreg-se e derou an 18^t kantved : anavezet mat eo istor bilhedoù bank LAW; mon ret a voe c'hoazh er vro-se da vare Dispac'h 1789 (kounait an "assignats"), da vare Dispac'h 1848, betek 1850, e-pad Brezel 1870 ha betek 1878, e-pad Brezel 1914 ha betek 1928, hag erfin adalek 1936, da vat. Stabiloc'h e voe moneiz Breizh-Veur, peogwir ne voe diferet ar mon ret gant ar gouarnamant saoz nemet etre 1797 ha 1820 hag a-c'houde 1931. Hevelep disentez a voe kemeret gant ar Stadoù-Unanet etre 1861 ha 1879 da geñver Brezel an Digevrediñ hag adalek 1933. En holl riezoù ar bed emañ hiziv ar moneiz-paper dieiltaladus o ren.

Ar monc'hwezh.

Anadenn ar monc'hwezh a c'houlenn bezañ termenet gant aked. An diaester d'e dermenañ a zeu a berzh ma'z argerzh hervez ur c'helc'h-emwashaat, ha ne gouezh ket a-du an deskriverion war ar poent eus ar c'helc'h a zo da sellout evel ar poent-loc'hañ.

Pep kresk eus ar bilhedoù en amred ned eo ket dre ret ur monc'hwezhadur. Pa gresk war un dro ar monadur ha kenderc'h hollet ar vro, pe c'hoazh pa gresk ar monadur o tiaraogiñ ur c'hresk eus ar c'henderc'h, n'eus ket monc'hwezh. Monc'hwezh ez eus avat pa c'hoaryez ur c'hresk padus eus ar monadur, hep kresk, ha zoken gant un digresk, eus ar c'henderc'h.

Hogos an holl vonc'hwezhadurioù c'hoarvezet en Istor arnevez a voe c'hwezhadurioù eus ar moneiz-paper. Koulskoude, nemeur a wech, e c'hoarvezas ur c'hwezhadur eus ar moneiz-aour, evel er Stadoù-Unanet e 1919.

Anv a reer ivez eus c'hwezhadur ar c'hred pa gresk al liñveladoù e moneiz-skritur hep ma kreskfe ar moneiz monet; eus c'hwezhadur ar goprou, pa gresk hollad ar goprou hep ma kreskfe a-geñver hollad ar madoù kenderc'het.

Termenet e vez ivez ar monc'hwezh evel :

- refiver ar barr-prenañ (1), pe c'hoazh refiver an araezioù talañ;
- gorreadur hollet ar prizioù, da heul ur forc'had etre ur goulenn re vras a-berzh ar bevezif hag ur c'hinnig re vihan a-berzh ar c'henderc'hañ (Am.: inflationary gap, pe ode vonc'hwezhus); gant ar gorre-

adur-se e vefe lusket ur c'helc'h-bac'h : pep luskad-gorren ar prizioù o tevoudañ ur barrad-c'hwezhañ er monadur, hemañ o tegas d'e dro ul luskad-gorren nevez.

Dereziou ar monc'hwezh

Hervez tizh, ment ha disoc'h ar monc'hwezh e tiforc'her :

- ar monc'hwezh_lor, pe stlejus, merket gant ur gorreadur bloaziek eus 1 pe 2 %;
- ar monc'hwezh_bihan, pe guñv, pa gresk ar prizioù eus 20 pe 30 %, - da skouer, ar monc'hwezh-aour c'hoarvezet er Stadoù-Unanet;
- ar monc'hwezh_boutin, pe reoladus, - da skouer ar c'hresk (lies 27) c'hoarvezet er prizioù gall etre 1938 ha 1951;
- ar monc'hwezh_diroll, pe direoladus pe c'hoazh gourvonc'hwezh, pa sav ar prizioù buan-ouzh-buan; ar splannañ skouer e voe ar monc'hwezhadur a reuzias en Alamagn goude ar brezel-bed kentañ : e diwezh 1923 e kouste un timbr-post ur milmilion a varkoù. Disoc'h ar gourvonc'hwezh zo an divoneizañ, da lavarout eo freuzadur ar moneiz.

Devouderezh ar monc'hwezh

Meur a zamkaniezh zo bet kinniget evit displegañ penndevoud ar monc'hwezh.

Ar monc'hwezh dre ar c'houstoù.

Degaset e ve c'hwezhadur ar prizioù da heul gorreadur prizioù-koust ar c'henderc'hañ. E-touez ar c'houstoù e ve ar goprou an devouder galloudusañ. Ur wech aozet mat ar c'hweluniadoù micherourion, e lakafent da greskiñ ar goprou ha gwask ar goprou war ar prizioù. Eeunik eo avat eren dre ur gevreizhenn eeun gorreadur ar goprou ha gorreadur ar prizioù. Un trede elfenn a zo etrezò : helvoù an embregerezhioù. Ret eo lakaat e penn-kont ivez kresk askorusted al labour gant araokadur ar c'halvezerezh hag, e par an nevid beveziñ,

emzalc'h ar batromed e dinodadur ar prizioù-gwerzhañ.

Prizioù-koust all a c'hell bezañ e devoud ar monc'hwezh : priz ar c'henderc'hadoù enporzhiet, danvezioù krai pe aozadoù bevañs, priz ar feurmou hag ar gwazadurioù foran, ar re-mañ reolet gant ar gouarnamant.

Ar monc'hwezh dre ar goulenn.

Ur riskl anat a vonc'hwezh zo gant ur goulenn reñverek a-dal d'ur c'hinnig diastennus diouzhtu en ur gennad eus ar c'henderc'hañ, en ijinerezh an dir da skouer, - anv a reer neuze eus gwaskoù monc'hwezhus o werediñ er poent-mañ-poent eus armerzh ur vro; an termen-mañ a dalvez emañ eno holl amplegadoù ar monc'hwezh. Devoudet e c'hell bezañ ar reñver goulenn-se gant pep kresk en dispignoù prevez pe foran, gant pep kresk er postadurioù.

An armerzhourion saoznek a ra eus ar monc'hwezh dre ar goulenn ar "pull inflation" (monc'hwezh diwar sachañ) hag eus ar monc'hwezh dre ar c'houstoù ar "push inflation" (monc'hwezh diwar vountañ). Ned eo an diforc'hadur-se evit talvoud nemet da geñver prantadoù berr a-walc'h : pa vez tud en daou du d'un nor ez eo diaes lavarout a-benn ar fin piv en deus labouret ar muiañ evit he digeriñ, ar vounterion pe ar sacherion. Pouezus eo evelkent evit al levier-ezh politikel gouzout e pep mare stad an div reizhiad bountañ ha sachañ a-benn kemer an diarbennoù rekis : moustrañ war ar goprou da skouer, pe en enep war ar postadurioù. Aze e weler unan eus gwanoù armerzhel an damanoù frankizour.

Ar monc'hwezh diwar framm an nevid.

Pelloc'h, pa studiimp ar prizioù, e welimp resisoc'h petra eo framm an nevid pe frammadur gwikefre an nevid. A-walc'h eo gouzout evit bremañ e seller ouzh ar prizioù er reizhiad frankizour evel ouzh disoc'h un emgann kemplezh etre ar werzhourion hag ar brenerion ha, pa vezont lies hini o kinnig ur c'henderc'had lavaret, etre ar werzhourion o-unan. Alese e teu an termenoù unwerzhouriezh, daouwerzhouriezh, nemeurwerzhouriezh, h.a., a arverer evit menegiñ ar frammadurioù nevidel diazezet war unan, daou, un niver bihan, h.a. a werzhourion evit ur varc'hadourezh bennak.

Ar frammadur nevidel ar muiañ techet da zegas ar monc'hwezh e ve

an nemeurwerzhouriezh, da lavarout eo ar c'hevezerezh etre un niver bihan a firmoù galloudus en ur gennad eus ar c'henderc'h. Ar skouer splannañ eo an ijinerezhioù treloc'hel er Stadoù-Unanet er bloavezhioù 50 : mestroniet e oa an nevid er gennad-se gant un nebeut pennoù greanterezh a lakae prizioù uhel da zinodañ.

Argerzh ar monc'hwezh hag emell ar gouarnamant.

Er reizhiad frankizour e tinod ar prizioù e disoc'h un daelerezh etre gopridi ha goprerion pe, er pleustr, etre ar c'hweluniadoù micherour ha patromed ar greanterezh. Stourm a ra ar c'hweluniadoù evit kaout goprou uheloc'h; stourm a ra ar stroll patromel da virout ha da greskiñ e helvoù. An heuliad gweredoù-dazgweredoù o c'hoarvezout eus an emstourm-se a denn dioutañ e-unan, aes eo henn kompren, da c'horren ar prizioù. Ar monc'hwezh avat a zo e penn an argerzh a c'hoari peurvuiañ evel un harz war gaderezh an emstourmerion, er feur da nebeutañ ma vennont derc'hel ar gevredigezh e kempouez. Evel ma welimp pelloc'h, e c'hell ur stroll pe egile kaout deure o kas ar reizhiad armerzhel ha politikel da get, ha neuze kemer hent ar monc'hwezh a-benest-kaer. Setu perak e rank ar gouarnamantoù emellout ha "stagañ stardelloù kreñv ouzh ar rod" (Emsav 9/244), da lavarout eo kemer diarbennoù evit stankañ an hent ouzh ar monc'hwezh, dre skornañ ar prizioù da skouer, pe reoliñ an derannadurioù. N'eo ket dizañjer koulskoude hualañ ar monc'hwezh, rak diverkañ an azonoù ned eo ket pareañ ar c'hleñved.

Devoudadoù ar monc'hwezh

E gwir, unan grevus eo ar c'hleñved azonet gant c'hwezhadur ar monañ, hag anaezioù all niverus a zeu diwarnañ. Ar re bennañ zo :

Fonnusaat an dispign diwar-goust an arboellañ : seul vui ma tiwerzheka ar moneiz, seul vui e tifrae e zalc'herion d'e leuskel. Anadenn an tec'h rak ar moneiz eo : "deviñ a ra ar bizied". Ur wech peg ennañ droug ar c'hwezhañ, ne c'hell ket ar moneiz c'hoari ken e roll a virer an talvezadoù (Emsav 15/85). An arboellañ ne vez ket

embreget ken, hag an arboelloù kent a deuz. Pep hini a gresk e zispignoù rak aon ouzh gorreadur ar prizioù da zont, ha dont a ra gorreadur ar prizioù diwar gresk an dispignoù : ur c'helc'h-emwashaat eo, a anver c'hoazh troellenn ar monc'hwezhañ.

Gwanaat ar re wan. Digempouez eo pep kevredigezh hag ar gevredigezh frankizour dreist ar re all. Enni ez eus peorion ha pinvidion, pe evel ma kaver ergorekoc'h, dereatoc'h ac'hoel, lavarout : armerzhidi wan hag armerzhidi greñv. Piv eo an armerzhidi wan ? Ar re gozh, ar re dic'houest dre un arbenn pe unan all da ren ar stourm armerzhel. Kredourion int, ha pa ve dre berzh ar c'horvoderioù treuzdoug (Emsav 9/246). Diazezet eo ar gredouriezh avat war werzh verkel ar moneiz hag, evel just, ar werzh werc'hel o vezañ tizhet gant ar monc'hwezh, ez a ar wanarmerzhidi gwanoc'h c'hoazh.

Kreñvaat ar re greñv. An armerzhidi greñv zo ar re a c'hell embreger, ampresterion int, eleze dleourion. C'hoari a ra enta evit o mad ar wikefre a noaz ouzh an armerzhidi wan. Mar daskoront d'ur mare m'emañ ar prizioù er feur 200 ur yalc'had arc'hant amprestet er mare m'edont er feur 100, ne restaolont e gwirionez nemet an hanter eus o amprest gwerc'hel hag e viront an hanter all en o godell da vat.

Dre vras enta, en ur monc'hwezhadur e vez an tu-koll gant an arboellourion, an dud war o leve, hag ivez ar c'hopriddi rak gorreadur ar goprou a chom bepred war-lerc'h gorreadur ar prizioù (Emsav 10/276); hag e vez an tu-gounit gant an embregerion, ar genwerzhourion, ar vrokerion (2).

Evit ar c'hounideion, e tennont o mad en ur prantad kentañ eus ar monc'hwezhadur, dreist-holl mar bezont dleourion (merourion, metaerion). Bep ma pad ar c'hwezhadur avat, e c'horre buanoc'h ar prizioù greantel eget ar prizioù gounezal ha kollourion int en diwezh.

Droukhoalañ a ra ar Stad. Hep ket a var ez eo galvedigezh ar Stad kevarzhelaat ar boblañs hag unvaniñ ar gevredigezh. Dre-se ez eo he dlead stourm ouzh ar monc'hwezh, a denn da zanaat ar c'hleuz etre

kendereoù ar gevredigezh dre pinvidikaat ar binvidion ha paouraat c'hoazh ar re baour.

Koulskoude, e meur a geñver ez eo ar monc'hwezh korvoüs d'ar Stad hec'h-unan : pep embannadenn vilhedoù a vez ur c'hresk barreg-ezhioù digoust, kevatal d'un amprestadenn, pe gentoc'h d'ur gemedadenn. Un temptadur eo dre-se ar monc'hwezh evit ar Stad, kement-mañ a ro da veizañ perak e chom ar gouarnamantoù laosk ha war vordo alies dirazañ.

Linkrat a ra ar vuhezgezh o wiskañ neuz ar builhentez. Endra ren ar monc'hwezh e paouezer a arboellañ hag a brientiñ an dazoned, e koller karantez al labour; e kresk ar c'houlerezh. Padal, evit ar re a denn korvo eus ar c'hwezhadur ez eo diaes kilañ : labour zo evit an holl, n'eus ket a faezhadurioù, an helvoù a vez aes da ober.

Ha yac'h eo ar berzh-mat-se ? Ur stad-ambren eo kentoc'h : kollet e vez pep skiant eus an diawel, dic'hallus ez a ar steuñverezh hag e pep lec'h ez en em sil an diheboelled. Dispignet e vez raktal ar moneiz liñvel, o prenañ evit prenañ, o kas un emarc'hanterezh digenheul, ha dre-se un dreistaveadur arvarus.

Diwezh ar monc'hwezhadur

Gwelet hon eus e vez, hervez ar c'hendereoù, arbennoù ergorel ha dangorel da baouez, pe er c'hontrol, da badout gant ar monc'hwezh. Didennoc'h eo padout eget paouez. N'eo ket aes ivez er broioù frankizour goulenn digant ur boblañs dizunvan ha digevarzh plegañ a-vloc'h d'ar genurzh rust ampleget gant an dic'hwezhadur, - pa vez rummadoù o tennañ o mad eus ar c'hwezhadur e-unan. Ret eo menegiñ degouezhioù all man'emañ ket a anien armerzhel an arbennoù a zo da glask degas ar monc'hwezh, met a anien politikel. LENIN a selle outañ evel ouzh an doare efedusañ da freuzañ ar reizhiad vourc'hizel ha da blaenaat o hent d'an dispac'herion.

Ar monc'hwezhañ zo anezhañ un araez dreist da gomezañ treuzhentoù tremeniat 'zo, ha da gas da benn evit un darn an diberc'hennadur. Evit a sell ouzh ar poent kentañ ez eo anat da skouer e

roy ur c'hresk a-vloc'h eus ar goprou merkel an tu da habaskaat e-pad ur pennad ar feulzadegoù devoudet dre ret, ur prantad 'vo, gant diskar ar goprou gwerc'hel. Evit a sell ouzh an eil poent, ez eo ar monc'hwezh ar benveg da ziberc'hennañ hep poan evito, dre un argerzhad didro-kaer, an dalc'herion wirioù moneizel. Ar poellgor a aesafe a-galz e labour zoken o talañ da berc'henned ar c'hevalaoù traezel, - greantioù hag all, - digolloù termenet d'ur sav bennak, gant ma tivizfe war un dro kas da get gwerzh an digolloù-se kent na vo pell dre ar monc'hwezhadur. Erziwezh ez eo dav kounañ e ve drastet dindan daolioù tourterezh ar monc'hwezhadur bloc'hadoù greantel prevez 'zo chomet dibistig betek neuze. Netra, ha Lenin henn merkas fraezh, ne zegas freuz kement hag ar monc'hwezh : "da zistrujañ ar reizhiad vourc'hiz, e tleit dirollañ he moneiz" (3).

Lakaet er-maez an degouezhioù dibarek-se e vezer evelkent muioc'h prederiet gant lakaat un termen d'ar monc'hwezhadur eget gant reuziañ armerzh ar vro. Penaos avat en em gemer evit treiñ penn d'an argerzh monc'hwezhañ ?

Tuet eur da soñjal evel just ez eo ar penndevoud a ranker tizhout : c'hwezhañ a ra ar monadur en arbenn eus dieiltaladus ar moneiz, ar pare a zle dont enta dre an distro d'an eiltaladusted. Ne vez ket arveret bepred ar mezegadur-se koulskoude, - pa vez re glañv ar moneiz monc'hwezh et pergen. Studiañ a raimp an daou zegouezh : an diskoulm dre an termen lakaet d'ar mon ret, an diskoulm hep termen (pe gant distro) d'ar mon ret.

An termen d'ar monc'hwezh dre an termen d'ar mon ret.

Bez' ez eus meur a seurt disoc'hoù hervez derez grevusted ar c'hwezhadur, actrouniusted ar gouarnamant, deltu ar bobl.

1) An disoc'h spletus : dic'hwezhadur hag azgwerzhekadur. Goude ur monc'hwezhadur bihan, - eleze pa n'en deus ket kollet ar moneiz ouzhpenn 30 % eus e werzh-aour, - e c'haller distreiñ hep re a boan d'ar feur-eiltalañ diagent. Ur wech divizet an distro gant ar gouarnamant, e vez "sunet", lamet eus an amred, lavarout a reer c'hoazh ezamredet, al lodenn reñverek eus ar bilhedoù, ha divonet e vez al lodenn-se. An dic'hwezhadur eo; drezañ e vez restaolet d'ar moneiz e werzh leun, azgwerzhekaet eo ha diverket eo pep roud eus ar mon-

c'hwezh. Ur skouer a zic'hwezhadur klok gant azgwerzhekadur a gaver gant ar Gold Standard Act ma lakae termen drezañ ar Gouarnamant Saoz d'ar mon ret diferet da geñver ar brezel bed kentañ (1925).

2) Un disoc'h amspletus : an divoneizadur. Pa'z eo aet an droug betek ar stad diroll, ar gourvonc'hwezh, da lavarout eo pa gouezh hogos da netra gwerzh-aour ar moneiz, ne chom nemet un disentez : dilezel ar moneiz-paper o ren ha krouiñ unan nevez, ar pezh a anver divoneizañ. Ar skouer anavezetañ eo krouidigezh ar Reichsmark nevez gant Alamagn e 1924 goude ar monc'hwezhadur diroll ha freuzadur ar mark kozh.

3) Un disoc'h all, amspletus a-walc'h ivez : an diwerzhekadur. Pa'z eo aet ar monc'hwezhañ re bell evit ma ve kaset un dic'hwezhadur gant berzh-mat, hag evelkent pa n'en deus ket tizhet ar stad diroll, e c'haller c'hoazh stabilaat ar moneiz, en ur par izeloc'h avat, da lavarout eo gant ur werzh-aour izeloc'h eget e werzh diagent. Eus an oberatadur-se e reer an diwerzhekadur pe, resisoc'h, an iswerzhekadur. An diskoulm-se a voe dibabet gant ar Frañsizion e 1928 pa voe krouet ar "franc Poincaré" a dalveze 65,5 mg acur, da gemer lec'h ar "franc Germinal" dezvel a-raok reuziad ar mon ret, hag a dalveze 322,5 mg acur.

An termen d'ar monc'hwezh hep termen (pe gant distro) d'ar mon ret.

Breizh-Veur ha Frañs, un nebeut bloavezhioù goude diwezh ar brezel bed kentañ, a zilezas ar mon ret hag a dermenas o moneiz e-keñver an aour en-dro, an eil gant azgwerzhekadur, eben gant iswerzhekadur, evel m'hon eus gwelet uheloc'h. Ha koulskoude, diwar 1931, e teue al lur sterling da vezañ dieiltaladus adarre, hag e 1936 e c'hoarveze an hevelep tra gant al lur gall. Tra souezhusoc'h c'hoazh, e 1933, ar Stadoù-Unanet, ha n'o doa ket dilezet ar mon frank e-doug ar brezel, a zilamas an dollar diwar e sichenn aour, oc'h ober anezhañ ivez ur moneiz dieiltaladus; n'eo ket un digresk eus an ateb-aour o degase da hevelep disentez, met un damant

all : frankaat d'an dleourion amerikan gwasket gant gorreadur ar prizioù; stabilaet e voe an dollar d'ur priz nevez iswerzhek diferet gant ar Gold Reserve Act (1934), hogen hep an diviz a eiltaladusted.

Evit al lur gall, e kendalc'has da goll gwerzh, peogwir e tiskenne eus 65,5 mg aour e 1928, da 23,34 mg e 1940, 7,6 mg e 1945, ha da 1,800 mg e 1959. Al lur nevez, savelet e 1960, a dalvez 180 mg aour.

Dre henvoaz eo avat e termener ar moneizoù dre o gwerzh-aour, rak, o vezañ ma'z int holl dieiltaladus, ne chom gant pouez an aour nemet un dalvoudegezh a skeul-daveiñ. En armerzh neoazh e seller nebeut-ouzh-nebeut ar moneiz evel ur c'hevatal-aour, met evel ur barr-prenañ.

An uswerzhekadur.

En enep d'ar pezh a weler boas e c'hell ur gouarnamant, dibaotkenan evit gwir, kreskiñ gwerzh-aour e voneiz. E-se o deus gouarnamantoù Alamagn hag an Izelvroioù uswerzhekaet an Deutschmark hag ar Florin eus 4,75 % e 1961. Un araez e oa evito da zerc'hel stabil ar prizioù ha da wareziñ an arboellourion. Displetus e voe avat d'ar c'hreantourion enporzhierion.

(1) Sl. Emsav 13/30 (18).

(2) Brokañ v., lakaat en arvar gant ar spi da dennañ korvo; er Yalc'h (Emsav 16/122), prenañ ha gwerzhañ talvoudennoù o klask gounit korvo diwar ur c'hresk gwerzh anezho; broker g., neb a embreg ar brokañ, er Yalc'h, er c'henwerzh, h.a.

(3) J. SCHUMPETER, Capitalism, Socialism and Democracy London 1942. Kavout a reer an arroud-mañ er p. 312 eus an embannadur gallek, Payot 1967.

